

Ar Gorsedd en Rosko 1934

D'am daou Bearon Drouiz

Ton : *Eskop Penn-ar-Stang.*

War troad } 9 - 10
 } 9 - 10

RANN KENTA

1

Ma mignonet, a beurz an Drouiz-Meur,
Jallrennou-Taldir, ma léal kenvreur,
Hon pedet da vont, ha mont a ran
Da Rosko 'vit ar *Gorsedd* er bloa-man.

2

Benn ma vaer en Urz digemëret
Daou dest-paeron gwest 'renker da gavet ?
Ma meuz dibabet prim aneze,
Daou Jarlez laouen evelton ive :

3

Daoust ma meuz daouzec-vloa-tri-ugent,
Hag èru, gant poan, serz en penn an hent,
Hon kweet war unan kosoc'h c'hoaz,
Kenderw-gompez da Anatol ar Braz !

4

Met p'ëo kalz yaouankoc'h egile,
Pegen brao 'vin ket (?) war ar *Men* gante :
Unan 'vel tad-koz, an eil 'vel mab,
Hag hen Penn-Rener paotred ar Falsab.

5

Gant stad e kasan dê ma bennoz :
Da Jarlez ar Braz, 'zo Maestr-Skolaer koz ;
Skriuanier breizec leun a furnez,
Amezec Taldir en kear Kear-Ahez ;

6

Ha dan eilvet, Charlez Cotonnec,
Hor barz " Pareour " Doktor galloudec,
A neuz adsavet deomp Breiz-Izel !
Gant ar gourenou, war lerc'h ar brezel ;

7

He Di 'zo gantan reizet iskiz,
Vel *madoberour* d'he holl genvroiz,
A zired de gavet noz ha de
Evit ho yec'het da gear Kemperle.

8

Gwelit, em c'hosni, pebeuz enor !
Da veza d'an daou Aotrou-man fillor,
Ha da veza brudet evelte (?)
En daou dû d'ar mor, fei ! pell da c'houde !

EIL RANN

9

Pa z'on hanvet *Drouiz* gant ar *Pouelgor* !
Deuz ma gwella 'rin d'ar Gorsedd enor,
O kana bepred beteg mervel
Forz meulodiou d'a c'hloar Breiz-Izel !

10

Kerz e ran-ta gant lorc'h da Rosko,
Da c'heul Yann-ar-c'Hamn hag Efflam Koët-Skau,
Lêc'h hon zur a drido ma c'halon
O klêvet korn-boud " *Abalar* " o son !

11

Eno 'welin c'hoaz gant plijadur
" Telen-Aour ", douger kleze hir Arzur,
" Mab-Argoat ", Herrieu, barz Labourer,
Even, " Karevro ", naoter Landreger ;

12

Fanch Gourvil, d'Herbais, Cueff ha kalz all,
Gant Breiziz Bro-Saoz, ha rumou Bro-c'hall ;
Met dreist holl hom *Barzezel* dispar !
O kinig d'an holl bôd an Uhelvar.

13

Korollêrien Breiz a zanso stard,
Deuz son ar biniou da c'heul ar vombard ;
En pad tri de leun 'vo jolori,
Dansou, jabadao ha kaniri !

14

Prijou 'vo roët évit kana,
Ha prijou d'ar gwiskamanchou brava,
Beteg d'ar Skritellou rimet mad,
Staget deuz peb Ti, da verka pep stad.

15

Kenvroiz, war zao ! deomp da Rosko ?
Da zifen hom gwiriou evel-ato,
O kana dispont diboez hor penn :
« Breiz da virviken ! Breiz da virviken ! »⁽¹⁾

16

Ya ! kanomp stard yez hom c'hendadou,
Goulennomp ma vo disket er skoliou ;
Sinomp hor mennad war ze tro-zo,
Beteg « ma vezo digabest hor Bro ! »⁽²⁾

Ch. ROLLAND

Kuzulier Ti-kear. ⁽³⁾

(1) et 2) Paroles de Taldir.

(3) Conseiller municipal.

Gwerz Yez Breiz

D'an Doctor Yann ar c'Ham, *Stourmer, nerzuz ha kalonec*



War Ton : Kloarec Pempoul

1

O yez ker Breiz-lzel ! yez koz ma c'hendadou,
Ar c'haera oufer komz dindan bôlz an envou.
Daoust a te ve barnet da goueza dilavar ?
Pa zonjan kement-se hon karget a c'hlaç'har !

2

Rag ganeomp, yez karet, te peuz an oll doare
Da frealzi hor c'hreiz, da rei nerz d'hon ene
Komjou ker brao stumet. lavariou mad ha fur
A zigor ar speret, 'ra d'an holl plijadur.

3

Dre gompz koulz a war gan, te 'oar dre da blegiou
Rei da c'houd kalz a draou gant neubeud a c'hiriou
Da zoniou koz 'deuz bed luskellet a viskoaz
Eur Wen-Dud kalonek en daou dû d'ar mor glaz

4

Da vouez 'vez a' beb-eil, deuz ma kerz an amzer,
War deod da wir mibien dudiuz, flour ha kaer,
Garo, krenn ha kalet, 'vel reyer ha dêro,
Dreist holl pa c'houlont peoc'h ha frankiz 'vit ho Bro !

5

Da gomz holl galloudec gant hom zud koz gwechal
A lake da grena paotret Saoz ha Bro-c'Hall ?
Da youc'haden skiltruz en kreiz tan ar brezel
Oa bepred « *tor he benn* », ha « *trec'hi pe vervel* ! »

6

Gwechal pa oaz komzet dre holl war douar Breiz
Ni oa eur bobl dispar, hag intanet hor c'hreiz,
Barek de n'em difen ha gwest da rei tarbar
Da gement gwenn-dud all a daol troad d'an douar

7

Seblantoud 'rae neuze, yez birvidic meurbed,
E kendalchaez ganeomp eur renk uhel er Bed,
Ha penaoz birviken na vijaez difêzet
Gant ar rum da b'hini 'oaz gant Doue rôet ?

8

Allaz ! hirie, yez paour, houd taget a bep tû,
Gwasket gant tud diroll, a ra did brezel rû :
Nac'het memeuz gant darn da vibien didrûe,
Maro ar goad 'n ho c'hreiz, dianket ho ene !

9

Ar yez eo koulskoude kaera tenzor 'neuz bed
Pep rum-dud dishanvel digant Krouer ar Bed,
Ha pep-hini 'n he vro gle dezan derc'hel mad,
Dindan boan da gweza 'vel kalz en eur gwel stad :

10

Ar re 'deuz dilezet, gwelit, ho yez kenta
Zo hirie war ar bed er bazen izella ?
Grêket, Hebrêanet, hag Ejebsianet,
Beteg ar Romanet, holl hint bed diskaret !

11

Ar bobl a nac'h ho yez e n'em varn he unan,
A deu de n'em westla d'ar walen ha d'ar boan,
D'an dispriz ar brasa, d'ar goasa dizenor
Oufe beza gwallet gant leor kaer an Istor !

12

Ar yez 'so d'ar boblou, dalc'hmad eur merk dispar
Vit dont de n'em renka war blusken an douar ;
D'helloud e n'em destum evit dont da c'harpa
Pep-hini he wiriou, he frankiz hag he dra.

13

Klanv fall c'han o welet kalz deuz ma c'henvrôiz
Oc'h ober fae bemde war ar yez hag ar c'hiz ;
Tud kazuz ha divez, diskiant ha diboell,
No deuz tam karante 'vit ho bro Breiz-lzel !

14

Pa vo maro ar yez er vro-man koulskoude,
Tan ar galon da c'heul a yêlo prest ive,
Ha na veomp ken biken met tud losk ha dister,
Da bere 'vo aman gret ar c'hiz a gerfer ? !

15

War zao-ta, mignonet ? rag an amzer a brez,
Sevomp holl a vagad evit difen hor yez ;
Eur wenn 'sort d'hon hini birviken na laezo
En n'hep stum war ar bed bale war he zeuillo ? !

16

Daoust a deomp da zerc'hel d'hor yez koz brêzonec
Ze n'harze tamp ouzimp da c'houd mad ar gallec ;
Kaeroc'h, ar c'Hallaouet 'gleche ive disk
Yez gwerc'h ar Vrêtonet, 'zo tad-koz d'ho hini (!)

17

Yez Breiz eo yez ar gear en hom flijaduriou
Ar gallec, yez ar Franz, pen d'alc'h hom Lezennou ;
An eil hag egile c'hell beva unanet.
Evel daou vignon braz, gant peoc'h ha lëaldet.

18

Ne m'eump drouk deuz n'heb den, na kâz deuz n'hep yez all,
N'heb a noaz d'hon hini 'vo ganeomp êru fall :
Ni gomzo zur gallec, holl en gwir Fransijen ;
Met brêzonec, klêvit ? n'ankounac'hfomp biken !

19

Neuz na nerz na galloud a grenn war an douar
Da harz eur vrôad tud da gomz ar yez a gar ?
He deod a zo d'an d'en, he vouez, en eur gir krenn,
N'heller ket o zroc'ha anez maga bosen ?

20

Difennomp-ta yez Breiz, an dever a gemenn,
Lêc'h den all d'er flastra n'eo peurz ebed biken ?
Diskomp reiz anezan d'hor bugale dreist holl ;
Tre 'vo kanet gante na yêlo ked da goll.

Ch. ROLLAND